

“KANNADIG” IMBOURC’H

Kelaouenn Emglev An Tiegezhioù niv. 73 Here - Kerzu 2011 Priz : 2,5 €

An dizvedelidigezh

“Dizvedelidigezh” : setu c’hoazh ur ger nevez e brezhoneg, a lavaro darn gant un tamm hegas ! Ya, emañ dres o paouez krouiñ anezhañ evit bastañ d’un ezhomm, da lavarout eo, keyvezhañ ar ger gallek “*démondialisation*”, nevez-krouet ivez gant ur politiker gall. War an hevelep tro e plij din diskouez d’hol lennerion e c’hell ar brezhoneg krouiñ gerioù nevez kenkoulz hag ar galleg, ha zoken aesoc’h egetañ a-wechoù.

E dibenn va fennad “*Meuleudi d’an Harzoù*”, embannet e-barzh Kannadig Imbourc’h niv. 71, em boa meneget Arnaud Montebourg, danvez-kevezer evit kent-dilennadeg ar PS gall. Dazaterset er skingasadenn skinwel Télé-Matin war France 2, e kinnige e levr “*Votez la démondialisation*”, ha diouzh ar pezh em boa komprenet ne oa tamm ebet a-du evit lezel ar gevredigezh varc’hadourel ren aferioù ar bed evit he brasañ buzadoù dezhi hec’h-unan, hag e klozen va fennad evel-se : “*Setu komzoù fur, em eus soñjet, hag unan all o kavout marteze n’eo ket dic’hizet c’hoazh an harzoù*”.

D’ar Sul 9 a viz Here 2011 e oa bet aozet ar gent-dilennadeg-se eus ar PS gall. N’eo ket aet ar maout gant danvez-kevezer an “*dizvedelidigezh*” evel-just, en trede renk edo, hogen gant un disoc’h bet kavet dic’hortoz gant an addisplegourion¹ bolitikel : 17% eus ar mouezhioù a zo aet gantañ, ha meur a gelaouenn da embann ur pennad evit gouverkañ ha dielfennañ an darvoud.

O vezañ m’hon eus skrivet meur a bennad er gelaouenn-mañ evit dianzav drougoberioù ar

vedelidigezh war hor buhez pemdeziek, e fellfe din klask dielfennañ perak ez eus bet kement a dud dedennet gant ar c’healioù bet eztaolet gant an den-se.

Da gentañ ur stadadenn : gant ar velelidigezh emañ a-du an darn vrasañ eus ar bolitikerion, ar re eus an tu kleiz koulz hag ar re eus an tu dehoù, hag a-du emañ ganto ar meziennoù bras a embann ez eo un dra ha ne c’heller ket stourm e-enep dezhi : un dra didec’hadus eo, emezo. E-tal dezho ez eus ar werin, ar paour keizh dilezet, o deus bet da c’houzañv diwar ar vedelidigezh-se, hogen komprenet o deus tamm ha tamm memestra, e oa ul liamm etre ar pezh a veze azavet² dezho gant ar bolitikerion, da geñver ar poblaters³ evit feur-emglev Maastricht da skouer, hag ar pezh a zo bet disoc’het evito : greantioù o serriñ hag o tilec’hiañ, an dilabour o kreskiñ, ar goprou o tigrskiñ... Arabat deomp nac’h ez eo bet krouidigezh Europa usvroadel, lammet an harzoù etre ar stadoù enni, ul lankad⁴ eus ar vedelidigezh diwezhel a zle hor c’has d’ur gouarnamant bedel renet gant un niver bihan a vankerion hollec’halloudek hag a renerion embregerezhioù bras-kenañ.

Pell eo bet an disoc’h diouzh pezh a empente gwir aduidi un Europa Unanet, maz eus kalz anezho e Breizh, da skouer, hag a wele pobloù Europa unanet evit difenn o lazoù a-gevret, ha neket un Europa deuet da vezañ un dachenn emgann diharzoù, evel maezioù Breizh da

¹ Addisplegour : *commentateur*.

² Azavet : *prometet*.

³ Poblaters : *référéndum*.

⁴ Lankad : *étape, phase dans une évolution*.

c'houde an adlodennañ, ha deroet⁵ d'ar gevredigezh varc'hadourel da dachenn hemolc'h kenwerzhel. Ouzhpenn-e, er penn-kentañ-holl, ne veze anv nemet eus Europiz etrezo, Europiz liammet kenetrezo gant an hevelep sevenadurezh, merket kreñv gant ar gristeniezh da skouer, hogen buan e voe anv da astenn ar savadur europat da vroioù na oant europat tamm ebet, a sevenadur disheñvel, Turkia⁶ da skouer, pezh a ziskoueze ar raklun⁷ bedelour a oa a-zindan. Rak Turkia n'eo nemet ul lankad er raktres hollek : an DSK brudet, pinvidik mor evel ma ouzer, sañset bezañ sokialour met bedelour daonet a-raok pep tra, ma oa darev an darn vrasañ eus ar C'hallaoued, da reiñ dezhañ palez an Elysée, a wele brasoc'h c'hoazh evit Europa. Soñj am eus c'hoazh eus e gomzoù en un abadenn skinwel, daou pe dri bloaz zo me gred, ma veze breutaet enni dres eus ledanadur Europa da Durkia. Evitañ ne oa ket a-walc'h gant Turkia, ret e oa enklozañ en Europa unanet-se ar Reter Nesañ gant Israel e-barzh evel-just, ar Maghreb hag ar Mashreb (Libia, Egipt), bevonn kreisteiz Europa a vefe ar Sahel evitañ, an Impalaeriezh Roman kozh en he fezh a-benn ar fin, a resize evit reiñ pouez d'e gomzoù. Ankounac'haat a rae e oa deuet abaoe arvor Su ha Reter ar Mor Kreizdouarel, da vezañ hogos penn-da-benn muslimat, pa oa sañset an Norzh bezañ chomet kristen, hag evit ar Yuzev gall ma oa, mignon bras da Israel e-lec'h ez eo tenn kenvevañ gant ar Vuslimiz, en dije gellout gwelout an digembuzusted etre an daou. Hogen kroaziañ a rae war an dra-se, en anv mont war-raok ar vedelidigezh. A-benn ar fin, en ur vont da c'hoari ar gastaouer e Manhattan en deus rentet servij d'ar C'hallaoued, ne vo biken ken o frezidant, ha gwel a se ez eo, hogen renerion all ar PS gall daoust ha disheñvel eo o mennozhioù e-keñver ar vedelidigezh, pa gave dezho e oa an DSK o gwellañ emstriver evit bezañ prezidant ?

Ne oa ket ezhomm da vezañ desket bras evit ijinañ pebezh reuz he dije degaset ar vedelidigezh e bed al labour. En ur vro vihan ez eo bihan an embregerezhioù, hag ar renerion anezho tost ouzh o gopridi, a vez anavezet ganto dre o anvioù peurliesañ. En ur vro vras ez eo techet an embregerezhioù da vezañ bras hag ar renerion anezho ha n'int ket diouzh ret eus ar

⁵ Deroet : *livré, mis entre les mains de qq.*

⁶ Evit aotren an dra-se, e nac'has politikerion 'zo, evel ar prezidant gall Jacques Chirac, da skouer, e vije bet meneget er Vonreizh europat, gwriziennoù kristen Europa. Evitañ e oant kenkoulz muslimat ha kristen, pezh a zo diwir e keñver an Istor.

⁷ Raklun : *projet.*

vro, ne anavezont peurliesañ nemet ar sternioù ; eus ar c'hopridi ne vez anavezet ganto nemet o dileuridi c'hweluniadel, hag e vez tenn alies an darempredoù ganto. Gant an embregerezhioù a vent europat, ur vent tizhet alies - war atiz ar bolitikerion - dre gendeuziñ embregerezhioù bihanoc'h, ez eo deuet an darempredoù da vezañ tennoc'h etre renerezh ha gopridi, ma vez lezet darn anezho war ribl an hent en abeg d'ar c'hendeuzadurioù, ha darn all difredet da c'houde, pa vez dilec'hiet ar c'henderc'h en ur vro maz eo marc'hadmatoc'h an dorn-labour enni (Europa ar Reter, Roumania, Slovakia, da skouer).

Gwelet eo an dra-se e live Europa, hogen e live ar bed a-bezh ez eo gwashoc'h c'hoazh an traoù. Embregerezhioù bras o deus kendeuzet gant embregerezhioù brasoc'h egeto, euvret ganto, gwelout a reomp bemdez an dra-se en ur lenn pajennoù ar gellidouriezh⁸ er c'helaouennoù. Postet e vez enno arc'hant ar bankoù bras, na vezont ket brudet da drueziñ ouzh ar paour. Deuet eo ar bed da vezañ ur pikol marc'had dieub (pal an OMC e oa) e-lec'h ma vez an holl o keveziñ, ha ma ya ar maout gant an hini a ginnig e varc'hadourezh d'ar priz izelañ, hag er c'hoari-se n'emañ ket, dre ret, an Europiz plaset e-touez ar re wellañ. Ar vicherourion, ha kalz tud all ivez, a oar bremañ pezh o deus gouzañvet er brezel kenwerzhel-se, evito hag evit o bugale, ma vez arvarus an dazont ganto.

D'am soñj ez eo en abeg d'an holl draoù-se ez eus bet kalz tud o vouezhiañ evit an *dizvedelidigezh* e kent-dilennadeg ar PS gall. Ahiniennoù ne c'hellont ober netra, hogen pa vez roet dezho an tu da reiñ o ali, e roont anezhañ, hag o niver a c'hell ober d'an traoù fiñval. Merzad un hennadelezh o vont da goll a c'hell ivez bezañ c'hoariet e roll. Bez' e c'houlenn ar vedelidigezh tud diwrienn, darev da vont divorc'hed-kaer da benn all ar bed evit kemer ur stael-labour. Tenn eo d'ar gerent gwelout o bugale, graet ganto studioù uhel, kuitaat ar vro ha mont pell, pell diouto. Echu eo gant ar vuhez familh hengounel. Piv n'en deus ket klevet ur vamm o respont d'unan all a c'houlenne outi keleier eus he bugale : en Aostralia, pe Amerika, e labour va mab bremañ... hag unan all : emañ aet va merc'h da Rusia, da heul he gwaz bet anvet du-hont gant e chadenn gourmarc'had... E keit-se e vez broudet, gant ar vedelourion (ONU), tud Afrika hag Azia, da zont da

⁸ Kellidouriezh : *la finance.*

adpoblañ Europa, bet diboblet a-ziagent, gant an hevelep bedelourion, dre ar sioc'hanerezh, dre ar bizenn hilastaliñ, dre ar vuhez dirollet bet pennlusket ganto.

N'eus ket labour da reiñ dezho : n'eo ket ur gudenn, ni hon eus an diskoulm ! Lezit ac'hanomp da reoliñ an dra-se, ha kouskit sioul ! Emañ *Big Brother* o teurel evezh !

Donwal Gwenvenez

Enbroañ, divroañ, repuidi bolitikel, hag all...

Hegaset on abaoe pell gant klichedoù ha mojennoù a zo o ren e mediaoù ar bed a-bezh, met dreist-holl e Bro-C'hall, Breizh e-barzh.

Marteze ez eo ret bezañ bet divroet hag enbroet, a-wechoù hep paperoù evit kompren ar wirionez, ma'z eus unan. Hag ivez, ez eo ret gouzañv gwaskerezh ur stad bennak evit kompren. Ur "stad" a lavaran hepken ha n'eo ket ur "stad nann-demokratel". A-wechoù an demokratiezh ne dalv na frankiz nag eürusted.

Ur wech, pell zo, e oan o tremen dre Washington D.C. evit ma labour. E Bethesda, d.l.e. e bannlev Washington e oa un ti-krampouezh. Eus Kemperle e oa e berc'henn hag e wreg. Displegañ a rejont din : "E-pad 5 bloaz da heul hon donedigezh amañ, hon eus bet droug ar vro, met bremañ ez omp amerikanoc'h eget an Amerikaned o-unan."

Dre vras, heñvel eo gant n'eus forzh pe zivroad e n'eus forzh pe vro. Perak chom enni ma n'eur ket plijet da vevañ enni ? Evit gwelout divroidi o leñvañ gant droug ar vro n'eus nemet arvestiñ ouzh ur c'hoari brudet war o divoud e Breizh.

Perak divroañ ?

En niverenn 67 Imbourc'h, em eus skrivet n'eo ket ar yezh-vamm (ur **yezh** ne lavaran ket), ar gwaskerezh politikel h.a. pennkaozioù an divroañ. Skrivet em eus : "An Amerikaned o deus kavet pe savet ul "lezenn" evel evit kalz a draoù, ankounac'haet am eus he anv, "somebody's law". Al lezenn-se a ziskleir un dra bennak evel : "mab den a zo dedennet, dre vras, gant ar bed a seblant bezañ gwelloc'h eget e hini. Muioc'h a frankiz, muioc'h a vadoù, a sevenadur, a yezh h.a. Neuze, ar broioù bras, kêrioù; uzinoù, skolioù a zo o kreskiñ enno hag ar re all zo o tigrskiñ. Ar galloud politikel ne c'hell ober netra a enep da se".

Ouzhpennañ a ran, er pennad-mañ, an darn vrasañ eus an dud dedennet gant ur vro all (met n'eo ket an holl dud) a zo ar re o deus c'hwitet en o bro orin. En o labour, en o studioù, en o buhez kevredigezhel. A-wechoù o deus bet

kudennoù, gant ar justis pe ar gerreizh. Laouen int oc'h adkregiñ o buhez en ur vro all, degemerus ma'z eus tu, hep anzav petra o deus graet betek-henn en o bro orin. Aes eo, a-wechoù, lakaat ar giriegezh war o gouarnamant sañset komunour pe kevalaour pe diktatour pe me oar-me. Repuidi bolitikel a fell dezho bezañ!

Ret eo din diskleriañ krenn ha krak : « *repuidi bolitikel* », war-bouez nebeut, n'ez eus ket anezho. Moarvat, ez eus bet en istor « *repuidi bolitikel* », da skouer noblañsoù o tec'hout e-pad an Dispac'h Bras evit chom hep bezañ lazhet, Armenianed o tec'hout diouzh Turked evit an hevelep abeg, Yuzevien o tec'hout evit chom hep bezañ heskinet gant an Alamaned, de Gaulle repud politikel e Londrez ha M. Thorez e Moskou h.a., h.a.

Ar mare-se a zo echu abaoe 50 vloaz da nebeutañ. Hiziv an deiz, ma'z eus ur gouarnamant o cheñch en ur vro bennak, e kendalc'h al labourerien onest hag ordin da labourat, ar studierien da studiañ... Mar n'int ket a-du gant ar gouarnamant nevez, e rankont kavout un doare da cheñch an traoù, met ne reont ket. Digarez eo evito, dreist-holl er broioù war eskoriñ⁹, da laerezh, da lazhañ, da breizhañ h.a, da c'hounit un dra bennak, ha ne reont foutre kaer eus kudennoù politikel. Gwir eo, pa'z eur paour, ez eo didalvez gerioù evel frankiz, demokratiezh... Bevet am eus an dra-se meur a wech em buhez.

En Egipt e oan tro-dro 1952, d.l.e. er mare d'ur seurt dispac'h evit kas kuit ar roue Farouk hag erlec'hiañ outañ Neguib. Stalioù, skolioù distrujet, laeroñsi, lazhadeg tud, n'o deus bet netra da welout gant Farouk. Koulskoude, an drouk'hraerien-se a zo bet gwelet e broioù zo evel stourmerien galonek. Fentus eo a-wechoù an traoù.

En Aljeria, er bloavezhioù 1950, tost an holl Aljerianed a oa a-enep Bro-C'hall hag evit an dizalc'hiezh. Hiziv an deiz, tost an holl

⁹ War eskoriñ : *émergent*.

Aljerianed a zo evit divroañ da Vro-C'hall. Ar « *stourmerien* » a-enep Kadhafi a zo ar memes re a stourme evitañ a-enep ar gouarnamant kent. Abaoe « *dieubidigezh* » Tunizia ha Libia (ha broioù all) ez eus muioc'h a zivroerezh eget araok an dieubidigezh-se. Perak 'ta ? H.a., h.a. ...

Paperoù

Boutin eo, e Bro-C'hall, lavarout « *den hep paperoù* » ha manifestiñ evit difenn anezhañ. An dud-se, hep « *paperoù* », d.l.e. hep aotre ebet da chom e Bro-C'hall, emaint o chom enni memestra. Dibunañ a reont zoken, ingal, er straedoù hep bezañ harzet gant ar gerreizh. Fentus eo. It, c'hwi, hep paperoù da vroioù a zo, da skouer ar Stadoù Unanet, pe Israel, pe Aljeria pe Rusia pe me oar-me, hag e welot petra a c'hoarvezo !

Petra eo ur stad dizalc'h ? Dever kentañ ur stad dizalc'h eo diwall he annezidi. De Gaulle en

deus henn diskleriet, met skiant-vat eo ar reolenn-se. Mod all, perak kaout ur stad dizalc'h, ma c'hall n'eus forzh piv dont hep aotre ebet en ur stad, gwelloc'h e vefe, evit ar stad-se dilezel he riegezh ha distrujañ he harzoù. Marv e vo ar vro-se buan a-walc'h. En o c'hreiz-kreiz, an divroidi hep paperoù a zo a-du ganin. C'hoant o deus bevañ en ur vro greñv ha bezañ diwallet.

Evit klozañ

Aon am eus, ne cheñcho ar pennad-mañ netra e kredennoù tud zo. Bez' eus tud a gred divrall emañ ar wirionez ganto, Marteze o deus ezhomm da goshaat, da vevañ e broioù all, bevañ hep paperoù, bezañ e-barzh un dispac'h bennak... Met poent e oa din rentañ kont eus ma skiant-prenet.

Jord Havelka

Speredelezh Pont Terenez

Evit mont da Landevenneg pe da Graozon, ha Kameled pelloc'hik, e kuitaer an hent a bevar etre Brest ha Kemper o treiñ a zehou da vont e-biou d'ar Faou da heuliañ un hent kaer war-zu ar stêr Aon. Neuze ez eus ur Pont evit treuziñ ar stêr, el lec'h anvet « Terenez. ».

Abaoe un nebeut mizioù ez eus bet savet ha digorlidet ur pont nevez, a vez lesanvet « *Pont Millau bihan* » gant an dud, rak kaer ez eo, hogen bihanoc'h eget ar gwir « *Pont Millau* » brasoc'h-kalz evelato, a zo e kreisteiz bro-C'hall, en un tu bennak. A-benn aesaat o hent d'ar c'hirri ez eo kromm ar pont, stumm ur blegenn vras dezhañ a ya eus an eil ribl eus ar ster d'egile. Evel-se ez eo bet lammet an dro-bleg a-skouer, kasaüs, a rae d'ar c'hirri gorrekaat-kenañ ha stankañ an hent da vareoù 'zo eus an devezh war an daou du.

Ar pont a oa a-raok a oa deuet da vezañ dañjerus. Kleñved ar betoñs, debret re vuan gant an amzer. Ne oa ket kozh anezhañ rak damc'houde an eil brezel-bed, war zigarez « *beaj dibenn ar bloavezh-skol* », e oa aet va amezeg a-gevret gant holl skolajidi sant Jozef Landerne e lec'h ma oa pañsionad, da arvestiñ ouzh « *ar Pont nevez* », deuet kozh abaoe eta, kabac'h zoken ! N'eo ket bet diskaret evit c'hoazh : aze emañ bepred, izeloc'h eget ar pont

nevez fim-flamm, kuzhet gantañ en e skeud, izel e gribell, mezhek koulz-lavaret, goude bezañ bet, tri-ugent vloaz 'zo, en e c'h « *Gloria Mundi* »...

Araozo, a-raok an eil brezel-bed e oa ur pont koad « Pont Terenez ». Tro am boa bet da glevout anv anezhañ e bloaz 1993 ha setu aze penaos :

D'an ampoent edon oc'h ober studioù e prioldi Rimont e Burgondia, dalc'het gant Breudeur sant Yann, a vez lesanvet « *Les petits Gris* », ha bet diazezet gant an Tad Marie-Dominique Philippe o. p., un dominigad santel, ur prederour bras a vourre gant studi skridoù sant Yann. Unan eus hor c'helennerien all a oa dominigad ivez, santel ivez, unan hag a oa aet kozh-tre ivez, ha kromm ken e oa diaes-tre dezhañ bale daoust d'e ganenn, an tad Dreyfus an hini e oa. Kelenn a rae deomp ar gresianeg hag ar « *Feizoniezh viblek* », un danvez aet er-maez a c'hiz siwazh dija d'an ampoent, kemeret e lec'h gant ar Biblvarnerezh, na daol war ar Bibl nemet ur sell skiantel-rik ha laïkaet hepmuiken, o lezel a gostez ar feiz a zo padal al « *lunedoù* » a rank gwiskañ ar feizad evit degemer ervat « *Komz Doue* »...

Laouen e oa an den atav, darev bepred da vousec'hoarzhin. kement-se a oa ur bam da welou, hag eñ hanter seizet ha kozh-« Noe ».

Abeg en devije bet da glemm e gwirionez, evel ma rae dres va mamm-gozh en hevelep amzer, a lavare d'ar re a yae d'he gwelout, tizhet ganti he fevarzekvet bloaz ha pevar ugent, e ranke chom war he gwele o vezañ ma oa deuet hec'h eskern da vezañ bresk-kenañ. Lavarout a rae, truezus, e oa bet “*disoñjet gant an Aotrou Doue*”.

Ur gambr rez an douar en doa an Aotrou Dreyfus er prioldi. Evel-se n'en doa ket da sevel diri da ober. Diouzh ar beure abredik e veze kaset gant unan ac'hanomp d'ar chapel e-lec'h ma lide bemdez an Oferenn trankilik war e bouez : an dra-se a oa ar pep pouezusañ en doa da ober, pa soñjer mat. Evel-se em boa bet tro da gomz gantañ. Pa ouezas e oa ur brezhon ac'hanon e c'houlennas ouzhin daoust hag-eñ ez anavezen Pont Terenez. Pa respontis e raen e lavaras din : “*Heñvel eo ar vuhez speredel ouzh pont kozh Terenez*”. Ne gomprenis ket diouzhtu, evel-just. Gant e vouse'hoarzh brudet e

sellas ouzhin gant e zaoulagad liv ar c'histin o lufrañ, goapaer un disterañ. “*Pa 'z aed war ar pont koad-se, e strake. Ha me, paotrig bihan d'ar poent-hont, e kroge an aon ennon, ha karet em bije bet tizhout buanañ*



m'am bije gellet ar penn all eus ar pont, gant aon na gouezhje ar pont en e boull ha ma veuzjen er stêr, hep chom da soñjal na sellout war va c'hiz, . ”

Evel-se ec'h ouzis e oa eus ur familh pinvidik yuzev a Bariz, dezho ur c'henkiz, tre e kichen Kraozon, e Terrug, e-lec'h maz aent da chom e-pad an hañv. O tont eus a Bariz e tremenent eta dre bont kozh Terenez.

Ar paotrig-se, gwisket gantañ dilhad heñvel ouzh hini ur martolod eus ar Verdeadurezh a vrezel, evel ma oa ar c'hiz da neuze, a yeas un deiz gant e vamm da bourmen war an tevenn e Terrug. Eno edo ur Vreizhadez o werzhañ krampouezh. Kinnig a reas ar vamm ur grampouezhenn d'he faotrig. “*Unan domm pe*

unan yen az po, paotrig bihan ?”, eme ar Vreizhadez. An Dreyfus bihan a oa speredek ha ne wele tamm billig ebet da astommañ ar c'hrapouezh. Setu e c'houlennas unan domm da welout penaos e rafe ar vaouez. Hag hi da sevel en he sav, treiñ war he c'hostez un tammig, ha kemer ur grampouezhenn diwar ar bern ma oa ... azezet warnañ ! Skodeget e oa bet ar paotrig, hag an Dominigad-kozh en doa dalc'het soñj mat !

Deuet mare an eil brezel-bed e oa cheñchet an abadenn gant e familh abalamour ma voe heskinet ar Yuzevion gant an Nazied, ha klasket dic'houennañ anezho. Kuzhet e voe ar paotr yaouank en un armel e-pad ar brezel en un tiegezh katolik. Roet e voe dezhañ ar Bibl da lenn. Unan gatolik, da lavarout eo Bibl ar Yuzevion, an Testamant Kozh, bet lakaet ouzh he heul an Testamant Nevez : ar Pevar Aviel, oberoù an Ebestel, o lizhiri ha re sant Paol, ha

Diskuliadur sant Yann da echuiñ. Diwar he lenn ha meizañ edo Hor Salver ar Mesiaz gortozet keit-all 'zo gant Israel en em droas an den ouzh ar feiz katolik ha goude ar brezel e c'houlennas ar vadeziant.

Goude-se ez antreas en urzh an Dominikaded hag e reas studioù hir kent bezañ degemeret da vat en urzh-se ha bezañ beleget. Neuze, o vezañ ma teue eus ar relijion yuzev, e voe kaset da Jeruzalem da genlabourat d'un embregadenn hir : savidigezh un droidigezh nevesaet eus ar Bibl, hervez an dizoloadennoù nevesañ, re gQumran, da skouer, lesanvet “*papirusoù ar Mor Marv*”, a gonter e-touez ar c'hoshañ dielloù eus ar Bibl a zo deuet betek ennomp. Evel-se e voe embannet “*Bibl Jeruzalem*”.

M'emañ ar Bibl-se ganeoc'h ne vo ket diaes deoc'h gwiriekat emañ an Tad Dreyfus, paotr bihan tevenn Terrug a grene pa ranke tremen war bont Terenez, war roll an droerion.

T. Gwilhmod

Sklaved dre natur

En holl lennegezh a brederouriezh, unan eus an arroudoù bet ar muiañ kasaet ha divrudet biskoazh eo ar rannbennad-se eus *Politikerezh* Aristotelez, ma tiskleir krak-ha-krenn an oberer ennañ ez eus tud a zo sklaved dre natur : kaer ho pezo dieubiñ anezho ha stambouc'hiñ anezho a haolioù, a-nebeudigoù e tistroint d'ar stad a sklav, peogwir int bet ganet gant ur spered e-giz-se, ne vo pareet gant netra.

Levraouegoù a-bezh a vefe ret evit dastum kement a zo bet skrivet a-enep d'an arroud-se. Lod a wel en diskleriadenn-se ur merk eus groñs-aotrouniezh an hengoun skolastek- aristotelek, stoliet a-drugarez-Doue gant Bacon ha Descartes, peadra da zigeriñ oadvezh an demokratelezh hag ar frankiz. Lod a wel zoken er c'hemm-se un dieubidigezh evit mab-den, a vefe tremenet eus "ur vuhez renet gant an tonkadur" d'un "tonkadur dibabet ez-dieub" (ur wech all e tisplegin hiroc'h ma soñj war an arguzenn-se, a seblant din bezañ diot penn-da-benn). Zoken meulerion deolañ Aristotelez a vez ret dezho klask digarezioù d'ar rannbennad-se : lavarout a reont n'eus aze nemet rakvarnoù ar marevezh-hont, ne oa ket kablus anezho ar prederour.

Padal, a-vuzul ma koshaan e kavan anatoc'h-anat diskleriadenn Aristotelez.

Deut ar soñjoù-se din diwar lenn buhezskrid-berraet Michel Foucault, savet gant Roger Kimball (war <http://uwacadweb.uwyo.edu/Ashleywy/foucault.htm>). Echu et ganin lenn ar pennad, e savas d'am spered ar goulenn anat : ma n'eus den ebet sklav dre natur, perak an diaoul neuze ez eus kleuboù sadomazoc'herezh ? Ar Foucault-se a oa un den mat-tre ar jeu gantañ, doujet ha meulet, ur c'hopr kaer gwarantet dezhañ bep miz gant ar Stad, met ur wechig an amzer e tileze kement-se-holl ha paeañ ker evit bezañ mezhekaet, gwallgaset ha kunujet gant paotred yaouank kigenet-mat gwisket en un doare heñvel-mik ouzh ar soudarded roman. Muioc'h eget an "*nostalgie de la boue*¹⁰" a zo aze : hiraezh d'ar sklavelezh, ne lavaran ket.

Ker boaziet omp da geal ar sklavelezh evel un dra lakaet dre heg war an dud, ken e komprenomp frazenn Aristotelez war an tu-gin, evel pa rafe anv eus ul lezenn er-maez eus

koustiañs an dud. Padal, evit prederour al Lise, natur ur boud a oa ivez unan gant e c'hoantoù donañ, kreñvañ ha digemmadusañ. En ur gevredigezh evel hini hiziv m'eo aet da get ar sklavelezh ez-ofisiel ha ma seller ouzh forzh pe c'hoant a sujidigezh evel un izelded mezhus a spered, ar bondoug-da-vezañ-sklav ne vev mui neuze nemet dindan stumm un diduamant revel prevez ; ar pezh a vez nac'het gant ar sevended a gav repu en oberoù fallvrudet.

Ar bondoug-se a c'hall en em ziskouez en un doare all avat, un doare heweloc'h ha kuzhet muioc'h c'hoazh neuze. An tropelladoù manifesterion a lak cheu e traoù Londrez hiziv, evel ar re a rae heñvel e Pariz e 1968, e Oslo e 2009 hag e degadoù a gêrbennoù eus ar Gornog da varevezhioù disheñvel, a vez dalc'hmat enno tud a veul hag a vag hiraezh d'ar gouarnamantoù groñsrenusañ er bed. E Kouba, en Iran, er Zimbabwe, er Soudan pe e Sina, e tegemerfent a-galon al labour sklavel , hag e kemerfent perzh gant startijenn er festoù dispac'hel ofisiel. Skweroù e vefent a-fed sentidigezh peurvat. P'en em gav tud a seurt-se en un demokratelezh arnevez avat, e troont da c'hourvennek ha feuls, fae a reont war an urzh bonreizhel a warez anezho, ha gant ur rokted diroll e torront hag e tevont pep tra en-dro dezho.

Petra eo kement-se nemet tro-spered ur sklav ? Dic'houest da vevañ dieub, ne zougont nemet d'ar vazh, a sentont outi pa vez tost, hag a veulont gant o foell koulz hag o c'han pa vez pell.

Ar bondoug-da-vezañ-sklav a zo liesseurt : hervez ar c'hevredigezhioù e kemm pasabl stummoù ar sklavelezh, hag ar pezh a zo ur bondoug hep muiken ne c'hall ket dibab an hentoù en em ziorro warno, hentoù a gemm hervez ar mare hag al lec'h. Ar pezh a dro da sujidigezh en ur vro a dro da zarsav en ur vro all. Setu perak ez eus muioc'h a zarsavidi er broioù dieub ha pinvidik eget er vroioù paour-razh, renet gant tiranted wadek. Dienez ha gwaskerezh ne grouont ket darsav alies. Ur bignidigezh diglok er gevredigezh, a-walc'h evit terriñ d'an ezhommoù diazez met ket a-walc'h evit terriñ d'an holl c'hoantoù-kreskiñ : sed aze sekred peurvat kenderc'hidigezh ur yoc'had hiniennoù leun a c'hourvenn hag a gasoni. Setu

¹⁰ E galleg en destenn orin, *hiraezh d'ar pri pe kleñved ar c'hoant distreiñ d'ar pri*.

perak ne zeu morse peoc'h pe anaoudegezh-vat diwar ar ragevezh-stadel : resev skoazelloù-stad a zo dija a-walc'h evit magañ kasoni diharz ouzh ar re n'o deus ket ezhomm a seurt skoazell. Gwiroc'h c'hoazh kement-se evit an dud a zo sklavel o vred. Kemerit un hinienn a c'houlenn an aluzen a-vouezh-izel en e vro c'henidik paour. Pa vez dilec'hiet d'ur bed a frankiz, a zemokratelezh hag a ragevezh-stadel, e resev evel ur galv-a-berzh-Doue, kouvi ar sofisted d'ur c'haer a dorraged en anv ar "yonez"

Pa lennit e levrioù ur prederour kozh un dra bennak a zo kontrol penn-da-benn da c'hizioù

ho marevezh, harzit 'ta war ho tech da zispleg an dra-se en un doare plijus ha frealzus evidoc'h, evel rakvarnoù ur marevezh aet da get. Amprout n'eo ket c'hwi an hini a zo o treuzkompren anezhañ abalamour d'ho rakvarnoù-c'hwi, o lakaat en e veg un dra estren outañ penn-da-benn.

Olavo de Carvalho

Brezhoneg gant Ewan Delanoy, embannet evit ar wech kentañ e *Diário do Comércio*, dindan an titl *Escravos por natureza*, niverenn ar 22 a viz Eost 2011.

Ned on ket eus ar Bed (Yann 17)

“N’eo ket evit ar bed eo e pedan, hogen evit ar re ac’h eus roet din” (Yann 17). “Me, ned on ket eus ar Bed” eme Jezuz. “Kement tra a zo er bed, eme Yann, ranklezzed ar c’hreud, ranklezzed an daoulagad, ha lorc’hentez diwar ar binvidigezh, kement-se ne zeu ket eus an Tad”.

Ar Bed a zo gwirvoud un Denelezh hep haelded-ene, un Denelezh a chom sac’het daoust da c’hwezhadenn Doue. Bez’ ez eo dismegañs ouzh un divezelezh a beurbadelezh, ouzh ur vuhezegezh diazezet war ar vuhez peurbadel. P’emañ ar Bed ur c’halloudegezh e dalc’h ar pec’hed, e tistaol Jezuz Mab Doue hag ez argas Doue diouzh obererezh Mab-den. E-se e nac’h bezañ diskibl. Hep an Iliz hag hep he fried Jezuz-Krist ez a ar Bed en dro abaoe pell.

Ar feiz e Jezuz-Krist a ra deomp bezañ enebet ouzh ar Bed, rak ar Bed, drezañ e-unan, ne anavez ket Jezuz, ha ne gas ket dezhañ. Douget e vez d’en em serriñ warnañ e-unan, da fougasiñ bezañ gouest d’en em ziluziañ hep skoazell diavaez, da zisteurel kement banne sklêrijenn all ; danvezelour-rik eo e zenelouriezh, evel hini Coluche, da skouer. Evit bed ar sklouferion hag an dud pizh, bed azeulerion ar feulster, an arc’hant, ar werc’hegezh¹¹ (an dreinded diaoulek) ez eo kasaus ar re a gred er Bed-all hag a laka da ziwan, adalek lomañ¹², un dra bennak eus ar Rouantelezh hag a zo eilpennadur holl talvoudegezhioù ar Bed-mañ. Ya ! Ur gevredigezh kilbleget warni hec’h-unan ez eo ar Bed-mañ, ha n’he deus da ginnig d’an den nemet ar rev hag ar berzh douarel. Ur bed kloz,

¹¹ Gwerc’hegezh : *efficacité*.

¹² Lomañ : *ici-bas*.

serret ouzh an dreistnaturelezh. Bez’ ez eo ar Bed pezh a zo douarel bet aloubet pep tra gantañ ; ned omp ket ken keodedourion an Neñv. Ur goullou ez eo, un ezvezañs, ur paouradur, un dizoueegezh pleustrek. St Paol a zibun (Gal. 5) c’hoantoù ar c’hreud : avoultriezh, orgederezh, idolerezh, hudouriezh, mezventi. Bez’ ez eo neuze ur frankiz wallsiek a wilioud ar c’hoant a c’halloud, lorc’hentez an trosez¹³, an direizhder, ar c’halvezerezhioù nevez a zisleber Mab-den, ar gaou, an torfedoù a-enep ar vuhez adalek ar gensevidigezh betek ar marv, ar peurlinkradurioù revel, kollidigezh an abegoù bevañ, an emlzh da ziskoulm, an emgarantez kaledet...

Ar Bed a zalc’h penn. Tevder e grogen a ra dezhañ bezañ diaes da vezañ treantet gant an Aviel, dre ma lid an talvoudegezhioù pagan : ne gomz nemet eus lomañ, eus kalvezoniezh, eus galloud, eus pinvidigezh, eus plijadur. Ar pal a zo feurmiñ ur palez 35000 € ar miz ! Un danvezelouriezh argadus a grog ennomp, a frik ac’hanomp ar fas ouzh an douar, a c’houlenn ouzhomp karout an douar, nemet an douar. Kement tra ‘zo a vez meizet, aozet, hiviziken en diavaez da Zoue, bez’ e vez un digasted seven ha yen : “Doue ? Petra fell deoc’h e rafen gantañ?”

Neuze petra ober ? Bez’ e lavar St Paol : *“Arabab deoc’h ober diouzh ar bed-mañ”* (Rom.) *“Ho tibabet em eus ouzh ho tennañ diouzh ar bed-mañ”*. Tennet omp bet gant Jezuz diouzh ar vreinadurezh ; graet en deus deomp anavezout ur vuhez dellezekoc’h, kaeroc’h.

¹³ Trosez : *crime*.

N'hon eus ket enta da gemplegañ d'ar Bed, d'ar pezh a reer en hor metou. Da vezañ teoget, d'en em zaskoriñ, d'en em zileizhañ, da gemplegañ d'ar re all, d'en em lezel ismoriñ, lonkañ. Ne zle ket an Iliz en em heñvelaat ouzh ar Bed, klask asant ur Bed rouestlek ha forc'hellek. Ha ne c'hellomp ket bezañ kristen ma vezomp re azasaet ouzh ar Bed, ouzh al lomañ, ma tegasomp ar Bed d'ar Bed. Na zisleberomp ket an Aviel, na davomp ket war gelennerzh an Iliz katolik, evit bezañ diouzh ar c'hiz, diouzh an deiz, evit plijout d'ar *politically correct*.

Hogen, Mab Doue o vezañ en em c'hraet den e rankomp en em zigeriñ d'an araokaat, d'an diorroidigezh, d'an hevoud, rak fellout a ra deomp ober eus ar bed raksal ar Rouantelezh. En E glod en deus miret Jezuz Nazared, un dra bennak eus e chomadenn war an douar e-touez an Dud. Hadañ a ran enta greun mat, en ur c'houzout ez eus dreog er park. Ret eo din bezañ e-barzh, hogen chom un all hag ober ar c'hemm etre ar pezh a lavaran ya dezhañ, hag ar pezh a lavaran nann dezhañ. Da salviñ eo ar bed, met

diouzh doare ar vezeion a vez oc'h aroueliañ¹⁴ ar vosenn, gant mil diarbenn. Bez' e lavar Jezuz deomp-ni e zeskidi : "*Ned oc'h ket perc'hennet gant ar Bed, setu perak ez oc'h argarzhed gant ar Bed*". Asantomp neuze da vezañ arlezekaet¹⁵ evit ar C'hrist. Asantomp da vezañ enebet ouzh ar re a lavar nann d'ar C'heloù Mat.

An disfiz ouzh ar Bed maz eo ar spered anezhañ enebet ouzh hini an Aotrou, ne empleg nepred ur varn rok e keñver tud a vev en ur c'hiz disheñvel diouzhomp, gwariet zokenoc'h, rak ar buhezioù ne vezont lennet nemet diouzh an diabarzh. Ar re a zo o frikotiñ gant ar Bed, e c'hell ar gwir bezañ ganto hag o oberoù a zo ar re o dije dleet bezañ hor re. Ne doullbac'her ket ar Spered Santel ! Samariad ar barabolenn ne bleustre ket an Templ. Ar Bed-mañ, n'emañ ket an Aotrou – tra reuzus - o pediñ evitañ, a c'hortoz diouzhomp, feizidi, gouloù war hor c'hantolorioù hag, er-maez e chipot-holen, holen nerzhus da ginnig dezhañ. **Youenn Troal**

¹⁴ Aroueliañ : *soigner*.

¹⁵ Arlezekaet : *marginalisé*.

Ledenez Rewiz

E derou ar vakañsoù e treuzemp Breizh eus Sant-Brieg da Ledenez Rewiz, dre Loudieg. Hent burzhodus ar vakañsoù war-zu Breizh izel. Mont a raemp da Gerheol, ti-hañv va mamm-gozh eus Pariz, un ti bras karrezek gwenn, gant stalafioù gwer teñval dirak aod Kerfago, tostik ouzh Porzh-ar-Venec'h. Eno em eus tremenet bep bloaz ar pep gwellañ eus ar vakañsoù hañv. Ne chome netra brezhon e Rewiz, seul vui ma veze aloubet-mik al ledenez gant an douristed e-pad an hañv. Un nebeut maouezed kozh a zouge c'hoazh koef Rewiz, setu holl.

Evelato em eus soñj eus pardon bras Lokentaz d'an Hanter-Eost. Neuze e veze prosesion vras dre ar bourk da vont betek an Tornaod Bras e-lec'h e oa sañset Sant Gweltaz bezañ bet lakaet e varc'h d'ober ul lamm bras da vont betek Enez Houad. Roudoù eus al lamm-se a oa er reier, war a lavared. Diouzh ar mintin abred a-walc'h e oa ret mont d'ar presbital da gemer dilhad breizhek evit ar brosesion. Met re nebeut a zilhad a oa evit ar mor a vugale a oa. Ouzhpenn-se e oa ret paeañ ar feurm eus an dilhad : ur "*Voltaire*", da lavarout eo dek lur gall. Ne zeus a-benn

da gaout an dilhad-se nemet ur wech. Lorc'h bras a oa ennon an deiz-se m'hel lavar deoc'h. Setu me eta, gwisket-krann gant va dilhad breton, e-kreiz dibunadeg vras an hanter-eost, en-dro din merc'hed ar vro en o c'hoef. Na pegen kaer e oant : eurediñ am bije graet a-walc'h ganto, ma vijen bet brasoc'h !

E ledenez Rewiz em boa leun a gendirvi a-berzh va zad. An dra-mañ a seblante natur din. Kavout a rae din e oa heñvel gant an holl diegezhioù, mui pe vui. Ne ouien ket e oa tiegezh va mamm-gozh a-berzh va zad unan diseurt-tre. Hen komprenet em eus tamm-ha-tamm. Ar gendirvi-se a oa kendirvi pell, pell-tre, rak al liamm a gerentiez a sav da dad-you va mamm-gozh ! An hendad-se, Gabriel de Francheville, Aotrou al Ledenez, a oa bet rannet e zouaroù etre e ziskennidi. Lod a oa o chom eno e-pad ar bloaz, met an darn vrasañ ne zeuent d'al Ledenez nemet d'an hañv, hag e veze stank a-walc'h an darempredoù neuze etre « ar gendirvi ».

An dud a vremañ o deus disoñjet ar pouez a veze roet gwechall d'al liammoù a gerentiez. Ur wech e oa bet klasket bodañ « ar gendirvi ». Meur a gantad a zeuas, hag ul

luc'hskeudenn a voe graet, 'vel rezon, met ken niverus e oamp ma rankas al luc'hskeudenner kilañ ha kilañ c'hoazh da c'hellout tapout an holl dud, hag e kilas kement... ma ne anavezet ket an dremmoù, re vihan, war al luc'hskeudenn. Ni a oa ur bobl a dud. E Breizh, war a lavarar, an holl a zo kendirvi. Un hollad tiegezhioù eo Breizh. E rankfe bezañ. Evidon-me e oa gwir. Breizh a oa, ent-fetis, netra nemet an astenn naturel eus familh vras « ar gendirvi », kendirvi al Ledenez.

Da zibenn ar 6^{vet} klas e voe profet din ur marc'h-houarn gant va zad-paeron. A-drugarez d'ar benveg burzhudus-se e voe digoret frank din dorioù ar frankiz rak dizale e voen aotreet da redek hentoù ledenez Rewiz da welout ar gendirvi. Evel-se ne voen ket pell evit anavezout an holl heñchoù a oa el Ledenez. Prenet am boa evit-se ur gartenn « *état-major* », spis-kenañ. Plijadur am beze o tizoleiñ anezho, hag o tremen dre lec'hioù distro, pep a anv brezhonek dezho, alies-mat. Dizoleiñ a ris dre ar munud maezioù kaer Breizh el ledenez, gant he aodoù kel lies, tevinier Penn-Wiz, kerreg Sant-Jakez, traezennoù ar Gozhvilin, krugelloù an Tornaod-bihan hag hini Caesar, Taol-maen Porzh-'n-Avaloù, froudoù bras ar Mor-bihan, milinoù-mor Kernerzh ha Brilhag...

Ar pep brasañ eus ar vakañsoù-hañv a dremenet da vont da weladenniñ ar gendirvi

eta, re gKoad-penn-kêr, Kozhiliz, Truscat, Suscinio, Kohanno, Kerahuil, al Lojeo ha La Cour. Da La Cour ez aen alies mat. Dek kilometr bennak diouzh Kerheol edo. Abaoe ouzhpenn 500 vloaz eo perc'henn an tiegezh war an domani-se, a rummad da rummad, hag evit mont di e ranken tremen dre Gastell meurdeus ha faro Suscinio. Gweladenniñ a raen anezhañ alies, tost bep hañv. Gantañ en va spered e oa aes din faltaziañ istorioù marc'heien ha brezelioù. Pa oa krennard va zad, ne bae ket evit mont e-barzh, emezañ din, rak ar vaouez a oa en ode a ouie “e *oa eus an tiegezh*”.

Diwezhatoc'h em eus gouezet e oa bet dimp ar c'hastell. Kement-se n'em boa ket intentet diouzhtu. Ne veze ket komzet eus se er gêr rak ni hon oa gwerzhet pep tra evit kempenn Maner Keraskoed Plugüen. Ur seurt mezh a oa, a gav din. Bezañ bet gwerzhet hon Douaroù a oa bet evel terriñ un tamm al liamm gant ar gendirvi, ul liamm a-bouez bras evit va zad. Alies e lavare e chome war e anv un dekvedenn eus tevenn Landraezheg, an tevenn a weler eus prenestr uhelañ « *La Cour* ». An testeni e oamp lod eus kumuniezh « *ar gendirvi* » e oa an tamm douar nul-se, moustret, paz aent d'an draezhenn, gant an douristed a aloube hol Ledenez e-pad an hañv.

T. Gwilmod

Keleier berr

Pêr Denez : E-kerz an hañv e oa aet da Anaon Pêr Denez. Dleek eo dezhañ emsav ar brezhoneg evit bezañ deuet a-benn da c'hounid an Aotreegezh evit ar brezhoneg hag ar CAPES/CAFET daoubennek gant donedigezh an tu kleiz e penn ar gouarnamant er bloavezhioù 80. Meur a aozadur en doa kemeret perzh enno en emsav, evel Hor Yezh, Ar Vro, Kuzul ar Brezhoneg, Skol Uhel ar Vro. Alies-tre e ra meneg Youenn Olier anv anezhañ en e Zeizlevr. War lec'hienn E.A.T. Ez eus ur meneger evit adkavout meneg an dud e pennadoù Y. Olier, ur vammenn diziouerus d'an neb a studio pizh buhez Pêr Denez.

Strollad Bleimor : Ur bladenn CD a zo e gwerzh gant Skaouted Europa “An Hent – Tro Breizh”, bet savet war aked ar strollad Bleimor, gant kenlabour skaouted ha skaoutezed Europa. E galleg ez eo an danevell veaj a vez kontet, a zo un digarez da selaou kantikoù brezhonek, hag ur gontadenn vrezhonek war sant Erwan. E strollad Bleimor ez eus Skaouted Europa, a gozh pe nevez, tomm ouzh danvez Breizh. Ganet e oa bet Skaouted Europa diwar “Skaouted Bleimor” diwar obererezh Perig Keraod, bet lenner

eus Imbourc'h aet da Anaon e miz Gwengolo 1998, ha Lizig e wreg. E ti Carrick 9,9 € + mizoù-kas.

Reuz : gant an ti-embann Sav-Heol ez eo nevez deuet er-maez “un dibab krennlavarioù brezhonek“, ul levr 134 pajennad bet anvet “**Pa nijo ar moc'h**”. “Pa nijo ar moc'h e nijo c'hoazh uheloc'h”, ur c'hrennlavar da ober goap ouzh unan a gont traoù digredus eme vMark Kerrain d'al lenner. Kinniget brav eo al levr, ha renket eo ar c'hrennlavarioù dre “ger-alc'houez” : “nijal” evit ar skouer-mañ. Siwazh ez eo displeget ar c'hrennlavar e galleg, evit gellout gwerzhañ muioc'h dre ledanaat kelc'hiad an danvez prenerion, hag ivez evit displegañ resis ster al lavarennoù. Kement-se e oa gouest d'ober an aozer, Mark Kerrain, e brezhoneg evel-just, hogen evit gwerzhañ e ranker lakaat galleg... Evel-just en deus graet an aozer e vad eus labourioù niverus a gaver endeo war an danvez talvoudus-mañ, a denn da “spered ar yezh”, eus tro-spered ar vrezhonegerion. Kavout a reer krennlavarioù nevez digloret abaoe ur remziad pe zaou, war a seblant, evel “aet ar pezh er faout ha takenn ebet da gaout” diwar-benn ur

mekanik emgefreek da zarbar evajoù a lonk ar pezhioù moneiz ha na servij ket an dud evit keloù-se. “Avel diwar ar Faou morse ne lavar gaou” a c'hellfe bezañ bet tennet dre ma ne sell nemet ouzh ur bastell-vro hepken. Re all a zo divalav ha ne ouzer ket na pelec'h na pe da vare ez int bet dastumet, pa reont dave d'ar frankiz revel. Kavout a reer ivez troioù lavar e-leizh a ra goap ouzh ar relijion gristen. An dra -se a laka tud 'zo da c'hoarzhin. Dre maz eo “un dibab krennlavarioù” e weler mat penaos ez eo bet graet an dibab. Moarvat n'en deus ket lennet Mark Kerrain an div studiadenn war an troioù-lavar kristen e brezhoneg bet embannet e niverennoù IMBOURC'H.310 ha 313 gant T. Gwilhmod ha Vetig Kervella.

Ar Chapel-Basamer (kreisteiz al Liger) : Anavezet mat eo **Reynald Secher** abaoe ma oa bet embannet e vannoù-treset war istor Breizh, a oa bet kavet re vrogarour ha dreist-holl re a-enep an Dispac'h gant azeulerion ar Stad C'hall. Emañ o paouez embann « *Du génocide au mémoricide* », *Eus ar gouennlazh d'ar memorlazh*, ul levr 448 pajennad (24 €). Dindan renerezh Jean Meyer, kelenner istor e Skol-Veur Roazhon, en doa klasket pizh en dielloù – pergen e renabloù ar parrezioù - pet a dud a oa bet lazhet en e barrez c'henidik gant an Dispac'herion : war dro eizh kant evit ur boblañs tri mil a dud. Ha tro-war-dro, er Vande, e sav ar gouennlazh da 200.000 bennak. Abaoe meur a zek vloaz ez aoz R. Secher kampoù en-dro d'ur chapel en deus prenet en e barrez c'henidik, gouestlet da Sant Pêr daoust da enebiezh c'hroñs ar Maerdi. Ar bloaz-mañ en deus aozet eno Devezhioù kentañ ar « Memorlazh » a-benn stourm a-enep an istor gall kefridiel a glask disteraat ha leuskel a gostez ar gouennlazh-se a zo c'hoarvezet evit ul lodenn vras-tre war douar Breizh istorel, hag en deus servijet da batrom evit Hitler ha Staline. Komz a ra R. Secher eus ar c'hentañ « Gouennlazh rakgreantel ».

Londrez : Hervez un enklask bet embannet er *British Journal of Sport medicine* eus miz Eost ha bet graet war-dro 11000 den aet en-tu all da 25 bloaz, e verra hor buhez a 22 munutenn pa sellomp e-pad un eurvezh hepken ouzh **ar skinwel** ! Un enklask all a gaver er *British Journal of Psychiatry*, war 877.000 maouez, en o zouez 163.831 bet gouzañvet ganto **sioc'hanadurioù**. Ar re-mañ a vez ankenietoc'h (+ 34 %), gouvidekoc'h (+ 37 %), troetoc'h da evañ alkol (+ 110 %), da vutuniñ kannabis (+ 220 %), da glask en em lazhañ (+ 150 %). Ur bredkleñved war zek a zeufe “war eeun” diouzh ur sioc'hanadur.

Liechtenstein : distaolet eo bet ar sioc'hanañ gant ur vouezhiadeg-pobl.

Sioc'hanadurioù : e 2009 ez eus bet jedet ganeomp war-dro **11000 sioc'hanadur e Breizh** istorel (7569 evit ar rannbarzh « *Bretagne* »), da lavarout eo kement ha poblañs kêrioù evel An Alre, Kemperle,

Ploufragan, Dinarzh, Pornizh . E Frañs, war-dro 220.000, an hanter dre bilulenn-sioc'hanañ. 26 sioc'hanadur evit 100 ganedigezh.

Izelvroioù : E 2010 ez eus bet 3136 den helazhet, pezh a zo 19 % ouzhpenn eget e 2009. Abaoe 2000 ez eo kresket eus 50 %.

ABU : Gant Aozadur ar Broadoù Unanet e oa bet dibabet mare an Hollsent ha gouel an Anaon evit merkañ war an ton bras kresk poblañs ar bed, a vije aet en tu all da **seizh miliard a dud**. Ez kefridiel ar babig a zo ur plac'h eus ar Filipinez. Kement-se avat n'en deus netra da welout gant ar fed maz eo ur vro gatolik poblet mat hag a nac'h an hilastalerezh... evit poent, nag ur c'hoant divalav da spontañ an dud, d'ar mare-se eus ar bloaz a anver ivez «Halloween», gant ar reñverad a c'hourdrouzfe kempouez ha dazont an Denezh. Un degouezh ne oa ken, a lavarar dimp. E gwirionez, n'eus ket tu da dermeniñ ken resis-se niver an dud, ha nebutoc'h c'hoazh ar vro ! Ne lavar ket an ABU e talc'h poblañs ar bed da greskiñ dreist-holl dre ma hira an hoali¹⁶ keitat tra ma tisgresk ar ganedigezhioù dre vloaz dre vil den.

Enkadenn gellidel er bed : setu amañ doare ar riezstadoù a zo sammet ar gwashañ gant o dleoù, hervez an **Aozadur evit ar C'henober hag an Diorren Armerzhel (O.C.D.E.)**. Renket int hervez pouez o dleoù e o C'henderc'h Diabarzh Gros (PIB), da lavarout eo kementad ar binvidigezh produet bep bloaz. Japan : 197 %; Island : 142 % ; Italia 127 % ; Gres 123 % (e 2011 e rakweler 150 %, ha 160 % e 2012) ; Belgia : 105 %. Stadoù Unanet : 89 % e 2009, 100 % d'an 18 a viz Ebrel e oa bet diskennet notenn ar Stadoù-Unanet gant « Standard and Poor's » en abeg d'an dle dreistgoñvor : 14270 miliard a zollaroù) ; Portugal 90 % ; Iwerzhon : 25 % e 2007 ha 83 % e 2010 (arvesterion gellidel 'zo a rakwel 113 % e 2012 ha 120 % e 2013) ; Hungria 90 %, Kanada 86 %, Frañs 67 % e 2007 (1310 miliard), 78 % e 2009, 82 % e 2010, 84,5 % e dibenn trimiziad kentañ 2011 ; Alamagn 84 %.

Europa : “An hanter eus ar feulster en Alamagn a-berzh tud dindan 21 bloaz a vez a berzh tud a zeu eus an enbroerezh” eme Angela Merkel. Hervez Stadegoù Kengevredad Suis 60 % an doullbac'hidi a zo estrenion, mulzulmiz anezho peurvuiañ. Hervez Rannbarzh aferioù islamek Dubaï ez eo muzulmaned 70 % eus an doullbac'hidi e bro Spagn. E Frañs e vefe etre 60 % ha 70 % eus an doullbac'hidi a relijion vuzulmat hervez ar Washington Post (berzet eo sevel stadegoù war an divoud-se e Frañs).

Kristengaserezh : en anv ar “*frankiz-ezteurel*” hag eus “*frankiz an arzourion*”, ez eus bet aozet abadennoù a dag personelezh ar C'hrist, e Frañs pergen. *Piss-Christ* en Avignon, a ziskouez luc'hskeudenn ar C'hrist kroazstaget en ur werennad staot. *Golgota Picnic*, ur pezh-c'hoari kasonius, ma

¹⁶ Hoali : *espérance de vie*.

vez anvet Jezuz “*el puto diablo*” gant bilhedoù-bank en e gleizennoù. Erfin, pezh-c'hoari hudur Castellucci ma vez taolet kaoc'h war skeudenn Jezuz. Daou vil a dud a oa e Roazhon d'an 10 a viz du o pediñ dirak an *Théâtre National de Bretagne* e-pad ma veze ledet en diabarzh kaoc'h war dremm Hor Salver en anv an “arz”.

Tunizia : da glemm ouzh emled an islamouriezh e Tunizia (strollad Ennahda) e oa bet kavet fentus gant Charlie-Hebdo kemm talbenn ar gazetenn ha lakaat « *Charia Hebdo* » gant ul luddresadenn eus Mahomed. Bountet ez eus bet tan en o burevioù.

Irak : bep bloaz abaoe diskar renad Saddam Hussein e vez merzheriet, lazhadeged ha rediet da guitaat ar vro kantmiliadoù a gristenion irakat. Ne chom nemet un hanter milion anezho : digresket int eus an hanter.

Libia : Filmet eo bet munutennoù diwezhañ Kadhafi e Libia. Boureviet ha lazhed e voe, eñ hag e vab, hep tamm prosez ebet, hag an deiz war-lerc'h, e voe embannet e vo hiviziken diazezet al lezennoù war ar Charia. Enkrezet bras eo Kristenion ar vro.

Ejipt : ar Gopted, kristenion abaoe deroù ar Gristeniezh hag a ya c'hoazh d'ober un dekvedenn eus ar boblañs daoust d'ar gwaskerezh a-berzh an Islam abaoe trizek kantved, a wel ilizoù devet ingal er vro da heul « *an Nevez-amzer arabi* ». Pa vanifestont e vez tennet warno. Ar Charia a oa bet lakaet da lezenn-ziazez gant Sadatte met gant ar Vreudeur vuzulmat a gresk o c'hrog er galloud n'eo ket echu an heskinerezh.

Siria : kalz eus Kristenion Siria a gav gwelloc'h ganto renad Bachar El-Assad en abeg d'ar renadoù islamegour nevez a vez savet da heul an « *Nevez Amzer Arabiat* » a wask ar Gristenion. Lennet e vez war mogerioù Damask “*An Alaouited* (sektenn muzulmat El-Assad) *d'ar bez hag ar Gristenion da vBeyrouth !*”.

Goldman Sachs : an danvaridi¹⁷ pomperion ! En Italia evel e Gres, koulz ha gant Bank Kreiz Europa, o deus ar c'halvezvelourion¹⁸ a zo o paouez kemer ar penn anezho, ul liamm etrezo : holl ez int izili gozh eus ar bank Goldman Sachs, c'hwezh ar soufr gantañ, tamallet dezhañ kaout un atebeged en enkadenn ar *subprimes* er Stadoù Unanet hag en enkadenn dleoù Bro-Ellaz. Mario Monti, o kemer plas Berlusconi en Italia a oa kuzulier e ti Goldman Sachs abaoe 2005 ; Mario Draghi, prezidant nevez Bank Kreiz Europa a voe bez-prezidant Goldman Sachs etre 2002 ha 2005 ; Lucas Papademos, tevezeg¹⁹ gresian nevez, n'eo ket bet war-eeun eus koskor Goldman Sachs, hogen e oa gouarnour Bank Kreiz Bro-Ellaz etre 1994 ha 2002, da lavarout eo er prantad ma veze falset ar c'hontoù gresian gant skoazell Goldman Sachs, evit aotren da Vro-C'hres emezelañ e 2001 en takad euro ; unan bihan diwezhañ evit chom hep bezañ re skragn : an atebeg karget eus an aozadur a ver an dleoù gresian, a zo e anv Petros Christodoulos, un ezel kozh eo, eus piv ? divinit... eus Goldman Sachs. *No comment !*

¹⁷ Tanvariad : *pyromane*.

¹⁸ Kalvezvelour : *technocrate*.

¹⁹ Tevezeg : *premier ministre*.

Pe trouz war an douar (*kantik Nedeleg*)

1. Pe trouz war an douar, pe gan a glevan-me ?
Kaerat ur melodi a zeu eus lein an Neñv !
Aeled, lavarit dimp 'vit petra 'vez kanet,
pe nevezded war-se er bed 'zo erruet?

2. Kanit ivez ganimp, kanit pobl an douar,
deut omp da larout deoc'h un nevezded hep par ;
ur mabig benniget, roue Jeruzalem,
a zo ganet 'vidoc'h er gêr a Vetlehem !

3. Erru eo an termen eus ar Profesiñoù,
o noz mil gwech eürus a dorr hol liammoù !
Kanit gloar hag enor da Jezuz, da Vari :
Doue 'zo 'n em c'hraet Den ; erru eo ar Mesi !

4. War an taol a greiz-noz, fenez ez eo ganet,
en ur c'hozh kraou disto, en eur stad trist meurbet ;
c'hwi her c'havo eno, etre daou aneval,
'vit tommañ e vemprou n'en deus 'met o anal.

5. Eno c'hwi a welo Krouer ha Mestr ar bed,
war un dornadig plouz, en un nev astennet ;

Eñ 'zeu da vezañ paour 'vit ho pinvidikaat,
distagañ ho kalon diouzh ar bed evit mat.

6. Ur marchosi disto 'zo palez ho Toue ;
eno 'kavot gantañ ur prezegour neve(z) ;
un nev eo ar gador en deus Jezuz choazet,
'vit prezeg ac'hano ar binijenn d'ar bed.

7. Deomp gant ar vugulion, redomp holl daveto ;
tostaomp d'E adoriñ ha da zeskiñ gantañ,
peseurt stad a zleomp ober eus hon ene,
pa 'z eo 'vit e salviñ, diskennet eus an Ne(ñv).

8. Daoulagad ma Jezuz a zever a zaerou,
gouelañ a ra dija dre faot hor pec'hedoù ;
ne skuilh c'hoazh 'met daerou, kent pell, c'hwi a oar mat,
e skuilho, evidomp, a boullad, e holl wad.

9. E zornigoù tener a vouj hag 'n em astenn ;
klask 'ra ma briata : ma c'halon a c'houlenn :
Jezuz ! O ma breur ! Evit hoc'h holl boanioù,
ne c'houlennit war-se nemet hor c'halonoù.

10. Sell c'hoazh e droadigoù o klask 'n em zispleg ;
evit hor pec'hedoù ez eseiont redek :
perak a zirazañ e klaskez-te pellaat ?
'N em daol en e zivrec'h, Eñ eo ar pastor mat.

11. Tostait tud pinvidik, poaniet gant ho madoù,
war gavell hor Jezuz n'ez eus 'met hailhonou :
penaos e c'hellit-c'hwi bout sod gant ho tanvez,
'keit m'emañ ho Toue er vrasañ paourentez ?

12. Tud paour hag afflijet, sellit ouzh ho Toue,
ha na gomzit ket mui enep ho paourente(z),
ne vern peger paour eur, n'ez eus ket, sur, paouroc'h,
eget roue an Neñv 'n em c'hraet den evidoc'h.

13. Ar pichoned bihan o deus pep a neizhiad,
hag al loened toulloù da lakaat o c'hofad,
met Jezuz, Mestr an holl, pa voe 'vidomp ganet,
evit harpañ e benn ne gave lec'h ebet.

14. Me 'wel er marchosi e vemprigoù tener,
hep tan hag hep dilhad, war var eus an amzer,
Jezuz a boagn 'vidomp gant ar poanioù brasañ,
ha ni doujañ a reomp er binijenn skañvañ.

15. Tostait, tud glorius, tud o c'halon uhel,
deut amañ gant Jezuz, da resev ur gentel :
penaos e kredit-c'hwi 'n em sevel ken uhel,
pa welit ho Toue o tiskenn ken izel ?

16. Tud sodet gant ar bed ha gant ar fals-joaioù,
tostait e-tal Jezuz, ha sellit e zaeroù,
c'hwi ne glaskit bemdez 'met 'n em ziduellañ,
p'emañ 'balamour deoc'h ho Toue o ouellañ.

17. Ar c'hraou a Vetlehem 'vo un tamall 'vidoc'h,
keit ha ma ne renot, ur vuhez santeloc'h ;
ar c'hrouadur tener-mañ un deiz 'vo gwelet,
leun a c'hloar eus an Neñv o tont da varn ar bed.

18. Eseiomp a vremañ d'ober ar peoc'h gantañ,
ha kinnigomp bepred ur galon c'hlan dezhañ,
rak ur galon duet gant binim ar pec'hed,
a zo mil gwech lousoc'h eget kraou al loened !

19. Pegen eürus oc'h-c'hwi, ô Gwerc'hez venniget !
C'hwi 'zo mamm d'ho Kroueour, hag hep koll ar
werc'hded,
goulennit ma hor bo, 'vit plijout da Zoue,
gant lod eus ho klanded, lod eus ho karante(z).

20. Ha c'hwi Jozef, den just ha fidel d'ho tever,
choazet oc'h bet 'vit goarn ha magañ Hor Salver:
goulennit evidomp ma vezo kreñv ar feiz
ma virimp gant aked ar c'hras-se en hor c'hreiz.

21. O Jezuz, va Salver, krou-a-dur benniget,
bezit meulet noz-deiz e pevar c'horn ar bed !
Roit dimp 'raok ho kuitaat grasoù gant largente(z),
ha renit hor c'halon da viken, o Doue

Dianskrid :

*Ar c'hantik-mañ, holl anavezet, a oa bet savet e
1792 gant Pêr Nourry, Person Begnen e-pad e
harlu e Bro-Spagn da vare ar Spont-Bras.
Embannet e voe e 1856 gant Labourlette,
adembannet e 1891 (war an destenn-se hon eus
labouret), goude-se e 1933 hag e 1994 el levrig
"Gloer de Zoué".*

*Trugarez da Loeiz ha Kristen evit o skoazell evit
an tammig-treuzskrivadur-mañ. Notennoù hir a
vefe bet tu da lakaat da zisplegañ an dibaboù a
zo bet graet evit treuzskrivañ ar c'hantik, met
n'eo ket dav rak n'eo ket ul labour skolveurel a
zo bet kaset da benn amañ. Bez eo test hepken
ez eo mat treuzskrivañ an oberennoù gwenedek
er yezh unvan peogwir ez eus enno ul lodenn
eus pinvidigezh hol lennegezh, dreist-holl
evidomp-ni kristenion.*

T. G.

Setu deuet dibenn 2011 gant an niverenn-mañ eus
Kannadig Imbourc'h, soñjit, mar plij, da gas ho
skodenn : 15 € (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn) da
adkoumanantiñ evit ar bloaz nevez. Kresket eo bet
un tammig priz ar skodenn en abeg da vizoù ar Post
dreist-holl, a gresk dizehan Trugarez deoc'h en a-
raok !

**Nedeleg laouen deoc'h holl, hag hor gwellañ
hetoù evit ar bloaz nevez a zo o tont !**

Mererezh :

15 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://pagesperso-orange.fr/kannadig/> (Notit eo bet kemmet chomlec'h lec'hienn EAT-IMBOURC'H)

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr, pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moulet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù Kergreven** 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X